

L. M. PERROT

Dragon Sant Paol

DRAME EN TROIS ACTES ET EN VERS



Er mor, hag arabad d'id ken
Dizrei da deuler spont e bro ar gristenien !


RENNES

IMPRIMERIE BREVETEE FRANCIS SIMON

1907

DROITS RESERVES

DRAGON SANT PAOL




10139

J.-M. PERROT

Dragon Sant Paol

DRAME EN TROIS ACTES ET EN VERS



Er mor, hag arabad d'id ken
Dizrei da deuler spont e bro ar gristenien !

RENNES

IMPRIMERIE BREVETÉE FRANCIS SIMON

1907

DROITS RÉSERVÉS

fb
BL
BL
PER

KINNIGET GANT DOUJANS

HAG ANAOUDEGEZ VAD

D'AN AOTROU MENGANT HA D'AN AOTROU TREUSSIÉ

O DEUZ VA RENET ETRÉZÉK AN AOTER,

HA D'AN AOTROU DE GUEBRIANT

DIFENNOUR Spered Breiz.

J.-M. P.



Lizer skrivet d'an Aotrou 'n Eskop DUBILLARD evit kaout digantan
aotre da lakaat moulla « *Dragon Sant Paol* ».

Saint-Pol de Léon, le 29 août 1907.

Monseigneur,

C'est un bonheur pour moi d'avoir à fournir à Votre
Grandeur mon humble appréciation sur la nouvelle pièce
dramatique bretonne intitulée « *Dragoun Sant Paol* »,
œuvre de M. l'abbé Perrot, vicaire à Saint-Vougay.

Un résumé succinct du drame dira mieux que toute
autre attestation l'esprit qui y domine.

L'auteur, en thèse générale, glorifie la victoire du Christ
sur le paganisme et l'heureuse fusion de la race bretonne
d'Angleterre avec les Celtes du pays d'Arvor. — La
première entrevue de Pol Aurélien avec le comte Withur,
chef des émigrés bretons, lui servira de thème.

La rencontre se produit dans les circonstances les plus
dramatiques. — Les Druides poursuivent de leur haine
les émigrés bretons, d'abord parce qu'ils sont étrangers,

ensuite parce qu'ils veulent implanter une nouvelle religion.
Ils font jurer à leurs Armoricaïns de les poursuivre jus-
qu'à complète extinction de la race. Le serment est tenu ;
la chasse à l'homme commence.

L'oppidum de Kastel ne résiste qu'un moment à leur
fureur : le temps pour Pôl, le prêtre du Christ, d'adresser
à son Dieu une des plus belles prières que la littérature
humaine ait enregistrées. — L'île de Batz est envahie.
C'est le dernier refuge. L'intrepidité de Pôl, l'autorité
de sa parole, la majesté répandue sur toute sa personne
les arrête un instant et les aurait fait reculer n'avait été
la rage du Druide. — C'est alors que le Dragon entre
en ligne. Le reste est oublié. Pôl fait appel à ses chré-
tiens. Un seul y répond, tant est grande la terreur
qu'inspire le monstre. Nuz, le nouveau baptisé, marche
sans peur aux côtés du futur apôtre du Léon. L'étole du
Saint est nouée au cou du dragon, et le vaillant jeune
homme le conduit à la mer, où il se jette pour ne plus
revenir. Nuz reçoit de Pôl le glorieux nom de Gournadec'h
(l'homme qui ne fuit pas).

La réconciliation des Celtes-Armoricaïns et des Breïons
est le fruit de leur foi et de leur vaillance.

M. Perrot suit pas à pas les anciens écrits. Les céré-
monies druidiques, magnifiquement décrites, sont emprun-
tées à Pline le Jeune. — Tous les noms de lieux et des

principaux personnages appartiennent à l'histoire, et leurs discours sont entièrement conformes au caractère que leur attribue la légende. C'est assez dire que l'esprit chrétien le plus intense y domine partout.

Un détail qui ne gâte rien : la langue est impeccable, l'action ne languit pas un instant, l'intérêt, vivement excité dès le début, va grandissant jusqu'à la dernière ligne du troisième acte.

C'est une œuvre de plus, Monseigneur, à ajouter à notre littérature bretonne.

Je suis avec un profond respect,
Monseigneur,
de Votre Grandeur,
le fils très humble et très dévoué,

F. CARDINAL,
Supérieur de Saint-Joseph.



ÉVÊCHÉ

de

QUIMPER ET DE LÉON



Quimper, le 31 août 1907.

BIEN CHER MONSIEUR LE SUPÉRIEUR,

Vu votre excellent rapport je permets l'impression du
Dragon saint Paol.

Votre tout dévoué,

† FRANÇ.-VIRG.,
Evêque de Quimper et de Léon.

*Levriou hag a zo bet etre daouarn an oberour hag o deuz
talvezet dezhan en eun doare pe zoare da zevel « Dragon
sant Paol ».*

Les Vies des Saints de la Bretagne Armorique, par Albert LE
GRAND.

Buez sant Paol, gant an Aotrou KERNE.

Saint Pol Aurelien, par MM. THOMAS et ABGRALL.

Saint Pol Aurelien, par l'abbé Alexandre THOMAS.

Maro sant Tremeur, par l'abbé Jean ROUDOT.

Sudarded sant Korneli, par l'abbé Joseph BAYON.

Barzaz-Breiz, par le vicomte H. DE LA VILLEMARQUÉ.

Introduction à l'étude de la littérature celtique, par H. D'ARBOIS
DE JUBAINVILLE.

Histoire de Bretagne, par A. DE LA BORDERIE.

**La Poterie aux époques préhistorique et gauloise en Armo-
rique**, par Paul DU CHATELLIER.

De la Persistance de la langue celtique en Basse Bretagne,
depuis l'établissement des Celtes dans la péninsule armoricaine jusqu'à
nos jours, par A. TRAVERS.

Les Inscriptions gauloises et le Celtique de Basse Bretagne,
par A. TRAVERS.

N'ouzoun ket piou en deuz skrivet ar gomz-man : « La Grèce dictait,
Eschyle Sophocle et Euripide écrivaient » ar pezh a rankan da anzav
eo, evit « *Dragon sant Paol* » Breiz ivez he deuz komzet ha n'em euz
bet ken tra da ober nemed destum he c'homzou.

J. M. P.

DRAGON SANT PAOL

C'HOARIERIEN (PERSONNAGES)

AN ARVORIZ

An Drouiz Devedek, beleg an heol bet c'hoariet da genta gant.
Ury, Roue kos an Arvor.....
Nuz, eur paotr 15, pe 16 vloaz.....
Telo, en oajou Nuz.....
Kadour.....
Millour.....
Guy.....
Orvoen.....
Ninian.....
Edern.....

Potred ar Run, 5 paotr euz 15 da 16 vloaz.....
Bugale.....
Benen.....
Dider.....
Herve.....
Efflam.....
Eneour.....
Derc'hen.....
Neventer.....

AR VRETONEC

An abad Paol, beleg ar C'hrist.....
Wizur, tiern ar Vretoned.....
Patrik, mestr-mesaer Wizur.....
Mesaerien.....
Tri denjentil oc'h heulh Paol.....
Erwan, mestr-offiser e lez Wizur.....
Suliau, barz Wizur.....
Patern, Kaner kos Wizur.....
Tud euz lez Wizur.....
Bugale.....
Eur floc'h.....
Eur manac'h oc'h heulh Paol.....
Eur pesketaer euz Enez Vaz.....

K. Boulc'h.
Yv. Paul.
P. Guillou.
F. Floc'h.
Yv. Tanguy.
Yv. Calvez.
J.-M. an Nan.
Renan Milin.
J.-M. Pot.
J^e Edern.
F^s Palut.
F^s Mear.
L. Colliou.
L. Cuff.
J. L. an Her.
J. P. Stephan.
J. Y. Stephan.
P. Dantec.
Joseph Stephan.
F. Pot.
Joseph Boulc'h.
F^s Dantec.

J^e Milin.
A. Palut.
L. Quere.
Yv. an Nan.
Louis Cuff.
F^s Prigent.
Guil. Tanguy.
Per. Tanguy.
J. M. Guennegan.
J. M. ar Bihan.
Guil. Ropars.
Daik Boulc'h.
Saik Guillou.
J^e-M. Ollivier.
H. Gourc'hant.
J. P. Milin.
J^e Berrou.
Louis Floc'h.
J.-M. Cuff.
Yv. Dantec.
F^s Dantec.
L^s Dantec.
F^s Pengam.
F^s Pot.
F^s Herry.
F^s Quéré.

An dra-man a c'hoarvezas er bloaz 512; p'edo ar Vretoned kenta harluet euz Breiz-Veur gant ar Zaozon o tiskenn war aochou an Arvor, el leac'h ma ne oa d'ar mare-ze nemed paganiz a ioa an heol o doue brasa.

An Arvest kenta a dremen en hanter 'n hent etre *Lesneven* ha *Kastell*.

An eil arvest a dremen er c'hastell kos bet savet gant ar Romaned ha perc'hennet gant *Wizur*.

An trede arvest a dremen e Baz azioc'h ar mor.



DRAGON SANT PAOL

I ARVEST

I DIVIZ

PATRIK ha NUZ.

PATRIK.

Hag a nevez 'ta Nuz ? Gant petra 'maout e chal
P'ema da zell ken trist ha da dal ken tenval
Lavar d'in petra c'hell krignat d'id da spered
Marteze 'm'euz louzou da voukaat da vorc'hed.

NUZ.

Va zal a zo tenval, ha va c'halon doaniet
Pa zonjan er goueliou a vo bremaik lidet
Ha ne vin ket enno.

PATRIK.

Goueliou, pe seurt goueliou.

A zo ?

NUZ.

An drouized, hizio e Brengoulou.
 A zo ganto Patrik, tantad ar goulou deiz
 Ha kement arvorriad 'zo kalon en e greiz
 Da genver ar gouel-man m'en deuz c'hoaz ar c'herzed
 Adalek aot Kastell, tre betek Penn ar bed
 Ne vank morse da zont ! Ah ! bremaik en dervenn
 Ar vro a bez a vô daoulinet er bedenn
 Nemedoun-me hebken.

PATRIK.

O krouadur edro !

NUZ.

Tenn eo kuitaat a grenn doueou koz ar vro.

PATRIK.

Deac'h edos o c'houlenn, ma redje war da dal
 Dour sakr ar vadiziant : Prest e oaz ha pa dal
 Emaout oc'h hunvreal atao en doueou
 Hag o sonjal zoken dizrei c'hoaz d'o goueliou.
 Ar C'hrist pa vez kavet n'heller ket e guitaat
 Ar pezh a garet kent 'zo red ankounac'haat.
 Ar C'hrist ne c'houlenn ket eun dra war zaouanter
 P'en em roer dezan va mignon e ranker
 En em rei penn da benn ha betek ar maro,
 N'euz ket a urz gantan pa vezer en ero
 Da zellet war al lerc'h na da jom da ehan
 War araok eo red mont betek an tremenvan.

NUZ.

E lez o mestr Wizur, e Kastell nag e Baz
 N'ho peuz ket a lidou nak a oueliou ken braz.
 Gouel an heol a zo kaër : Ah ! m'ho pije gwelet
 Eur wech ma vez ganto an tantad peurzevet
 Ar c'har a beder rod o vont euz Brengoulou
 Da gaz an drouiz-meur da zervenn al lidou
 Nao ejen gwen outan starnet a dri a dri
 Ha tud yaouank tro dro o armou o lintri
 Ha tud o vont warlerc'h, euz Kervorvan, Kerneac'h
 Kerilien, Porzliogan ha me a oar pe leac'h
 Kan ha trouz son ha youc'h eted an hent ganto
 Nao bann baltam etre an daou benn anezo.
 Ah ! m'ho pije gwelet an drouiz o sevel
 Gant e falz aour skedus war an dervenn uhel
 Da glask en he skourrou al louzaouen dispar
 A zigas peb dudi, a bella peb glac'har
 An uhelvar zantel ⁽¹⁾.

Dre ma kouez he blenchou
 Diudan falz ar beleg war zeiz an toucherou
 Ah ! m'ho pije gwelet na gant pebez doujans
 Peb hini a c'hed kaout e damm bodik a jans.
 Goude lid an dervenn, wardro anter an deiz
 E pigner da Vrenn heol evit ar sakriffs.
 Eno war an dosen a vir ar re varo
 O deuz krouet gwechall ha difennet ar vro
 E vez gant an drouiz lazet an nao ejenn

(1) Uhelvar = le gui.

En henor d'an heol rus « Doue ar sklerijen ».
 Hag eur ganaouenn skiltr o tregarni dre oll
 A embann dre ar vro galloud dispar an heol.
 Ha ! m'ho piye klevet an dud-ze o pedi
 Ha klevet gant ar barz an deleann o seni
 Eul lid hag a unan an nenv hag an douar
 Ouz her gwelet Patrik, ne jomjec'h ket klouar
 Nan nan, nan nan, eur bobl hag a bed evelse
 A c'hell en e gredenn fazia marteze
 Mez n'eo ket fall a grenn an oll lidou a ra
 Ha perag e ve fall mont d'o gwelet eta.

PATRIK.

C'hoant az peuz da drei kein da sklerijenn ar C'hrist !

NUZ.

Beza heb lid ebed, na beleg, a zo trist
 An den a zo ennan eur c'horf hag eun ene
 A dle anaout o mestr an eil hag egile.

PATRIK.

Ni hon deuz lidou kaër, ha re an Drouized.
 A zo en o c'henver distum ha dislivet.

NUZ.

N'ho peuz netra ken kaer ha soniou an deleann.

PATRIK.

Nih on deuz ar c'hleier d'hor gelver d'ar bedenn.

NUZ.

Etre Doue ha c'houi n'euz ket an drouiz-meur

PATRIK.

Ni hon deuz ar beleg, hennez, d'ar C'hrist zo breur

NUZ.

An dervenn sakr ganeoc'h n'eo ket anavezet

PATRIK.

Hon aoteriou a dal oll dervennou ar bed

NUZ.

N'ho peuz ket kutuillet biskoaz an uhelvar
 He deuz ouz peb klenved eur c'halloud heb he far

PATRIK.

War hon aoteriou-ni ema bara an nenv
 A ra d'ar gristenien beza yaouank ha krenv⁽¹⁾

NUZ.

Grit d'in eta tanva ar bara benniget
 E chomin krenv gantan ha yaouank flam bepred

PATRIK.

Ken a vez bet skuillet an dour sakr war an tal
 Euz dibri ar pred-ze n'euz ket da hunvreal.

(1) I Cor., x, 18.

NUZ.

Ho kleier, ho peleg, hoc'h aoter, ho para
 Pa n'euz ket anezo ne dalyont da netra
 Patrik, ne gomzit d'in nemed euz traou da zont
 Gant an traou zo hebken e c'heller ober kont

PATRIK.

Beleien zo pell-zo hag aman vint prestik

NUZ.

Kaer am euz o gedal, ne deu hini Patrik

PATRIK.

Goulennomp ouz Doue m'o lakaio da zont
 Kentoc'h

NUZ.

Tavit, en hent tud a glever o tont
 Tud o vont d'an tantad o kana kan an heol.
 Ken a dregarn ganto an ekleioiu dre oll
 Potred ar Run a zo, ha diouz son e vouez
 Ec'h anavezan mad, Telo Kerandevéz.

II DIVIZ

NUZ, PATRIK, TELO, *ha potred ar Run,*
 MILLOUR, KADOUR.

KADOUR.

Petra rez aze Nuz ?

O komz divarbenn Patrik.

Piou eo ?

PATRIK.

Eun divroad

En deuz ranket tec'het euz e vro

NUZ.

Eur breizad.

AR BOTRED.

Eur breizad !

PATRIK.

A zo bet treac'het gant ar zaozon

KADOUR.

Ar zaozon a blanvas gwechall en aot Bloskon

Hag a redas ar vro euz eur penn d'egile.

O laerez, o laza betek hor bugale.

En'o raok euz Breiz-Veur ho peuz ranket tec'het ?

Ya!

PATRIK.

KADOUR.

Potred ar skod-tan, ra vezint pulluc'het
Gant hon Doue Taran.

PATRIK.

Arabad eo goulenn
Ma kouezo euz an nenv malloz ebed war den

KADOUR.

Kaset o deuz hor gouenn hag hor bro da netra

MILLOUR.

Ra gouezo warno oll an oablou d'o flastra

KADOUR.

Pa ne ve m'eo ec'hon dounder hor c'hoajou
Ha pa ne ve m'eo braz galloud hon doueou
Edo great a vremen ar rins ebarz er vro
Ha sebeliet hor gouenn e linsel ar maro

MILLOUR.

N' o deuz nemed lakaat o fri war hon aochou

KADOUR.

Neuze war an teven e straklo o c'horfou

AR BOTRED.

Mil malloz d'ar zaozon !

PATRIK.

N'eo ket red o c'haret

Chom heb kaout outo drouk evelato zo red.

MILLOUR.

Pa n'oa mui seurt aman diouz o doare m'oar vad
Int eat warzu ho pro da ober eun droiad

PATRIK.

Daou c'hant vloaz penn da benn omp bet ouz o laza
Heb gellout o lakaat tamm ebed da giza
Dre ma falc'het unan dek all a zirede
Euz bro an anter-noz da glask heol ha leve.

Ar baganiz oll a unan.

Henor, henor, d'an heol Roue ar sklerijenn
Ra gouezo puill hizio e vennoz war hor penn.

PATRIK.

Kaer on deuz bet gourin ouz an dud digernez
Koll a dapemp bep taol ha kiza reamp bemdez
Setu m'hon deuz tec'het pa n'oat mui vit herzel
Da glask pell diouz ar vro hor gwelas o c'henel
Eun toull distro bennak da veva didrabas.
E Kastell, e Rosko, e Bloskon hag e Baz
Emaomp meur a hini.

KADOUR.

E koajou Balanan

Ez euz deuet ivez Breiziz war a glevan
Da jom a nevez zo.

TELO.

El leac'h ne garfe den
Na bleiz ebed beva.

PATRIK.

Kalz easoc'h eo tremen
Diouz al lônéd gouez eget diouz tud a zo

TELO.

Hag ar marlonk e Baz, hennez eo o lounko
Ma ne girit diouall.

PATRIK.

Ra blijo gant Doue
Diouall ar Vretroned ha Wizur o Roue
Diouz peb droug ha diouz dir ar zaozon digristen

MILLOUR.

Ra blijo gant Taran lakaat hiviziken
Flemmou e luc'hed kamm da ziskar peb den kriz
A venno dismantri ouenn zakr an arvoriz

NUZ.

Arvoriz ha Breiziz ma vefent a unan
A c'hellfe dont abenn euz Pôtréd ar Skod-tan

KADOUR.

Ya! kanomp a unan kanaouenn an heol aour
Ma teurvezo miret seder hon diou ouenn baour :
Deuit ganeomp, breizad.

PATRIK.

Siouaz n'hellan ket mont.

KADOUR.

Abred pe zivezad e vezo red deoc'h dont.
Neb ne fell ket dezan dirak an heol plega
A vez taolet er mor d'ar pesked da lounka.

An oll

Henor ! henor ! d'an heol Roue ar sklerijenn
Ra gouezo puill hizio e vennoz war hor penn.

*Goad gwin ha koroll⁽¹⁾**D'id heol**Goad gwin ha koroll**Tan tan ! dir ! oh ! dir, tan tan dir ha tan**Tann tann ! tir ha tonn tonn ! tann**Tir ha tir ha tann.*(1) Cf. *Barzaz Breiz*, p. 47.

Sang et vin et danse, à toi, soleil ! sang et vin et danse.

O feu ! ô feu ! ô acier ! ô acier ! ô feu ! ô feu ! ô feu ! ô acier et feu !
ô chêne ! ô chêne ! ô terre ! ô flots ! ô flots ! ô terre ! ô terre et chêne.

Et danse et chant, chant et bataille, et danse et chant.

Danse du glaive, en cercle ; danse du glaive.

Chant du glaive bleu qui aime le meurtre ; chant du glaive bleu.

Bataille où le glaive sauvage est Roi ; bataille du glaive sauvage.

Ô glaive ! ô grand Roi du champ de bataille ! ô glaive ! ô grand Roi.

Que l'arc-en-ciel brille à ton front ! que l'arc-en-ciel brille.

Ha koroll ha kan
 Kan ha kann !
 Ha koroll ha kan

Koroll ar c'bleze
 En eze
 Koroll ar c'bleze.

Kan ar c'bleze glaz
 A gar laz
 Kan ar c'bleze gaz

Kann ar c'bleze goue
 Ar Roue
 Kann ar c'bleze goue

Kleze ! Roue braz
 Ar stourmeaz
 Kleze ! Roue braz

Kaneveden gen
 War da benn !
 Kaneveden gen !

An oll

Henor ! henor ! d'an heol, Roue ar sklerijenn
 Ra gouezo puill hizio e vennoz war hor penn.

KADOUR.

N'eo ket awalc'h Potred, an amzer a dremen
 Ha Brengoulou zo c'hoaz eur pennad a c'halenn
 Ha 'ta Nuz dont a rez !

NUZ.

It atao mont a rin
 O c'hedal Lan Gerlaz ha Sane Kerivin
 Emaon eur pennad 'zo.

MILLOUR.

Ha c'houi jomo gant Nuz
 Pe ganeomp e teufot da c'houel an heol ruz !

PATRIK.

Na ganeoc'h na gant den, rak ne c'hellan ket mont.

KADOUR.

Ha petra 'ta neuze a vir ouzoc'h da zont.

PATRIK.

Ne blegan ket va glin dirak ho Toueou
 Rak ho Toueou-c'houi n'int nemed hunvreou
 : Eun Doue zo ha n'euz nemed unan hebken
 En nenv war an douar hag en iferniou yen.

MILLOUR.

Ah ! paourkeaz reuzeudik, tav gant da wall gomzou
 Ha diouall ne zounnfe da deod en da c'henou.

KADOUR.

Evelse 'ma Breiziz, oh ! n'oun ket souezet
 E vefent dre ar bed taolet ha distaolet,
 Trei o deuz great o c'hein da zoueou ar vro,
 Hag o malloz breman a gouez pounner warno.

Tec'homp ac'han Potred, n'eo ket brao chom aman
En aoun ne ziskennfemp izelloc'h da domman.

III DIVIZ

PATRIK *ha* NUZ.

NUZ.

Mouez ar goad a gomz hag a lavar d'in mont
Da heuill va c'henvroiz d'ar goueliou a lidont
Evit tenna bennoz an doueou er vro
Ne garfen ket beza kiriek euz he maro.

PATRIK.

Mad eo karet ar vro, mad eo karet ar ouenn
Mez karantez ar C'hrist a dle beza e penn
An oll garantesiou.

NUZ.

Ho kenteliou zo bet
D'am c'halon evel gliz d'ar bleun, hag em spered
Me gave d'in edo goulou deiz o para,
Ha pa dal e teuan ha ne welan netra.

PATRIK.

N'az peuz ket gouezet Nuz, diouall mad an haden
A ziouane ennout ken drant ha ker kempenn

NUZ.

Patrik livirit d'in hag eur bobl zo er bed
Ken truezuz e stad ha stad ar Vretoned

PATRIK.

Ne gredan ket e ve hini ebed ken trist.

NUZ.

Ha Breiziz evel pobl eo mab hena ar C'hrist
D'in me n'euz ket goall bell c'houi gomze evelse

PATRIK.

Ya en ober a riz.

NUZ.

Mar d'eo gwir an dra-ze
Mar d'eo Hen ar Mestr braz, perak e lez e dud
Da veza gwall gaset gant gouezidi yud
Livirit d'in Patrik, rak me garfe gouzout
Perak ar C'hrist a jom heb diskouez e c'halloud

PATRIK.

Galloud ar C'hrist a bar war ouenn ar Vretoned
Rak p'o sko'vel m'her gra e tiskouez o c'haret.

NUZ.

Skei hervezoc'h eta eo merk ar garantez.

PATRIK.

An tad pa sko e vab her gra gant digarez
Seul vui e vezer bet kizellet gant ar boan

Ha seul den e vezer : Eur bobl a vezo goan
Ma n'he deuz bet biskoaz netra evit mezur
Nemed hervez he youl eurvad ha plijadur

NUZ.

Gwir eo !

PATRIK.

Tud adarre.

NUZ.

Potred Kerberenez

Ha re Gerradenek.

IV DIVIZ

GUY, ORVOEN, NINIAN, EDERN.

GUY.

Ah ta Nuz dont a rez.

NUZ.

N'hellan ket !

ORVOEN.

N'hellez ket : Setu aze eur gont
Netra ne c'hell m'oar vad miret ouzid da zont.

NINIAN.

Ha goude ma rankfe mont war e varlochau
Peb arvoriad a dle mont da ouel Brengoulou

GUY.

Eun nebeud deizou zo ec'h heuilh ar Vretoned
Ha me zo sur o deuz troët fall e spered.

PATRIK.

Gant Breiziz eo ema breman ar sklerijenn
Hoc'h hini 'n he c'henver a zo tenvalijenn

GUY.

Gwelet a rit potred, kouezet oun war an tres
Nuz a zo touellet gant sorc'hennou hennez

EDERN.

E glevet am euz deac'h o komz gant disprijans
Euz Doueou ar vro.

NINIAN.

Koll a ra o doujans
O tarempredi re ar boued ar goun-man

GUY.

Me lavare ato oa da ziuall outan.

ORVOEN.

Ma vez anat ho peuz digoret ho kenou
Da skigna c'hoaz eur gomz eneb hon doueou
Diouallit.

NINIAN.

A hent all ni raïo eur vransell
Gant skourrou hor gouez tann hag ar pewar avel
He c'haso deoc'h en dro.

GUY.

Stourm ouz an doueou
Ho kouzanv er vro-man !

ORVOEN.

Chom heb mont d'o goueliou
Ha klask zoken miret ouz ar re all da vont !

NINIAN.

Piou a welas biskoaz eun den ken divergont !

EDERN.

Deuz 'ta Nuz, mall eo mont.

GUY.

Mil malloz war da benn,
Enebour an Heol ruz. Diouall ouz da groc'hen

PATRIK.

Ne grenan dirak den ! dirak Doue her gran.
Ouz e gounnar hebken e tlefet ober van.

(O velh Nuz o vont da heul ar re all).

Hag ez ez ?

NUZ.

Mont a ran. Kenavezo Patrik.

V DIVIZ

PATRIK e unan.

Ah ! tec'het a rez Nuz ! Krouadur reuzeudik
Rak eur ger az peuz aoun, rak eur zell e krenez
Rak tud hag az kourdrouz war an taol e sentez,
N'az peuz ket bet an nerz a ro ar Zakramant
Hag e plegez da benn d'an disterra tourmant.
Gant va deskadurez, dirak da zaoulagad
Tra nemed gleur ar C'hrist n'am euz gellet lakât
Ha krena ran breman o sonjal pa vezi
Pell diouzin, ar c'hleur-ze a c'hell dont da deuzi.
Perak ivez o Krist hol lezit evelhen,
'Evel ein dianket, den ebed d'hor c'helen
Euz ar re a gargit da ren an eneou.
A dreuz strouez ar bed betek porz an nenvou.
Ma selaouit peden Wizur ha tud e lez
Kent pell c'houi vo meulet dre an Arvor a bez
Kent pell an drouized gant o falz doueou
A gollo o galloud war an oll sperejou
Kent pell an arvoriz n'o dô med eun Doue
Ha c'houi o Krist Jezuz a vo an Doue-ze.

VI DIVIZ

PATRIK, NAN.

PATRIK.

Sell te zo dizro, Nan; bet out betek enno.

NAN.

Ya ! mez eur goall zarvoud 'zo digouezet hizio
Epad m'edo Goulc'hen o vesaat an denved
Et stank Kerliviri, tri bleiz zo bet saillet
Euz a goat Kervenguy.

PATRIK.

Tri bleiz e kreiz an deiz ?

NAN.

Da dri euz hon lônéd o deuz roët lojeiz
En o skrinou marlonk. Ha Goulc'hen zo bet brao
Dezan pa n'eo ket bet taget mui 'get ne d'eo
O lakaat anezo da reusteuler o fred.

PATRIK.

Goulc'hen zo bet dantet ?

NAN.

Netra'. N'euz drouk ebed.

PATRIK.

Mad ! Gwell a ze. N'euz forz arabad eo gortoz
Evît dizrei d'ar gear ma vezo deuet an noz.

NAN.

Eozen ' zo diblaset eun tachad mad a zo
Gant ar moc'h, ha Goulc'hen abarz pell a vezo
Keit hag hen. Ar c'hezeg a deu gant an hent doun
Hag al lônéd korn zo breman er c'hreac'h sounn.

PATRIK.

Mad eo !

VII DIVIZ

PATRIK, NAN, ARZEL, SENY, UFFOL *ha* FREGAN.

ARZEL.

Patrik ?

PATRIK.

Petra ?

ARZEL.

Eun toullad laeron-mor

A deu warzu aman ; e kichen stank al lor
Emaint o tiskuiza.

PATRIK.

Hag int eur maread ?

ARZEL.

N'eo ket bet tost d'in chom d'o c'honta ! eo m'oar vad.

PATRIK.

Grit d'an tri all sevel ha klask o c'hlezeier
Ha lemmet ho koafou ⁽¹⁾ ma c'hortozimp al laer.

(Da Nan)

Kemer da gorn boud-arm ha boud dre ar c'hoajou
Ma vo spountet yan zaos gant trouz an ekleioiu.

NAN.

Emaint o tont, klevit !

SENY.

Gourinadek a vo.

UFFOL.

Lez anezo da zont.

SENY.

Kan a glever ganto ⁽²⁾.

ARZEL.

Bremaik da gredi eo e kanint eur zon all.

(1) Koafou e galleg : lances.

(2) Klevet a rear o tont a bell eur poz pe zaou euz eur ganaouenn
zantel bennak, evel euz kan al labourer devot.

UFFOL.

Gwelet a raïnt bremaik ha ni c'hoari da fall.

FREGAN.

Ah ! Potred. en ho raok eur wech hon deuz tec'het
Mez ne dec'himp ket ken.

UFFOL.

Goad ho pô d'ho sec'hed.

ARZEL.

Tostaat a reont !

FREGAN.

Oh mad ! laoskit i, loskit i
Mez e leac'h kik kristen a gavint da zibri.

PATRIK.

Fazia a ran kalz mar d'eo eur c'han brezel
Ar pezh a vez klevet euz an traon o sevel.

NAN.

Unan, daou, tri. — Sell 'ta, na pebez gwiskamant.

ARZEL.

Toucherou zo ganto da zestum hon arc'hant.

FREGAN.

Oh ! sell'ta marzuz eo ! Drouized int glaouestre
O vont da c'houel an heol.

NAN.

Ya, n'ho deuz ken doare.

PATRIK.

Fazia a ran kalz' mar d'eo gwir laeron-vor
Tud hag a zo gwisket e giz Menec'h Bangor.

VIII DIVIZ

*Ar re a oa kent
Paol hag eur manac'h yaouank
Ha tri denjentil yaouank*

KOLOMBAN, KIERAN, ha SAN.

PAOL.

En han' an Tad ar Mab hag ar Spered Santel
Bezit oll benniget gant Doue ar brezel.

PATRIK.

Va daoulagad trellet zo gaouiad marteze ;
Ha gwir eo e vefe beleg ar C'hrist aze ?

PAOL.

Me eo beleg ar C'hrist a red mor ha measiou.
Evit kaout da gelenn eun nebeud eneo
War urz an nenv kaset teir gwech betek ennon
Am euz kuiteat Breiz-Veur evit diskenn e Leon

Da fuilla er c'horn-man va c'homzou ha va foan
Ma teuo warnezo, kristenien da ziuuan.

PATRIK.

Kannad ar C'hrist, d'o treid skuizet gant ar bale
Hol lezit da bokat an eil goud'egile.

(pokat a reont).

Rak ni a zo ivez ginidik euz Breiz-Veur
Hon deuz kuiteat hor bro, tizet gant an dizeur.

PAOL.

Anat eo diouz ho yez n'oc'h ket eun arvoriad.

PATRIK.

Nan, ni zo Bretoned, ha kristenien, va zad.
Mez eur pennadik-zo hor beleg zo marvet
Hag abaoe hor mestr ha ni zo glac'haret
Ha bemdez e pedomp hag emaoamp o c'hedal
Ma plijo gant Doue rei deomp eur beleg all.
Ha ! red eo koll eun dra araok gellout anaout
Pebez talvoudegez, mad awalc'h a c'hell kaout !

PAOL.

Pe hano'n deuz da vestr ?

PATRIK.

Wizur eo e hano.

PAOL.

Ha bras eo e c'halloud ?

PATRIK.

Oll Vretoned ar vro

A anav anezi, ha n'eo ket souezuz,
Rak dispar eo an den : kalonek ha nerzuz,
Speredok ha kristen, ne vank netra dezan
Evit beza doujet.

PAOL.

Ha tudou ar vro-man

A bleg dezan ivez ?

PATRIK.

N'o deuz an arvoriz

Mestr ebed evit gwir ; peb hini ra d'e c'hiz.
Ury o Roue-meur a zo deuet kabac'h
Ha n'en deuz nerz ebed pa zav eun tamm dispac'h
Evit lakaat ar peoc'h : an Drouiz eo a zo
Abaoue meur a vloaz o kas an traou en dro.

PAOL.

An drouiz ? Drouize.l' zo c'hoaz aman e kus ?

PATRIK.

Eur gouel a reont hizio en honor d'an heol rus.

PAOL.

E p' leac'h ema Wizur ?

PATRIK.

E Kastell pe e Baz

Ema o chom.

PAOL.

Mad eo !

PATRIK.

Ni a c'hell mont d'ho kas.

PAOL.

Karout a rafen mont ember betek ennan.

PATRIK.

Araok ma vô re noz c'houi welo anezan.
Ni eo e vesaerien a vez gant e lônéd
O redet ar c'hoajou leac'h ma vezomp lezet
Da vont. Eiz dez a zo emaomp o redet bro ;
Fenoz ema ganeomp adarre an dizro
D'ar gear !

(D'e genvreudeur).

Starnit raktal pemp loan d'an aotronez
Hag eun all evidon ma 'z'in d'o c'has d'al lez.

(Ar vesaerien a en em denn).

PAOL.

Kalz Breiziz oc'h aman ?

PATRIK.

Pewar ha c'hweac'h ugent
Edomp o tont el lestr, tri bloaz vô d'an Asvent.
Ar vro-man oa re vraz diouz an dud oa enni,
Rak evel e Breiz-Veur aman ar gouezidi

O deuz great eun dismantr euz ouenu an Arvoriz
 Ha betek hen hon deuz gellet ober hor giz,
 Den n'en deuz c'hoaz kavet e oamp a re 'n eur vro
 Zo bet touzet ker berr gant falc'h dir ar maro.
 Ar pezh a c'hell lakaat an tabut da ziroll
 Eo dre ma fell dezo hor gwelet o vont oll
 Hizio da c'houel an heol a reont tostik aman
 Ha n'omp ket evit mont wardro lidou pagan
 Anez trei kein d'ar C'hrist, ar pezh ne raimp biken.

PAOL.

Nan n'oc'h ket evit mont da oueliou digristen.

PATRIK.

Hag am euz aoun spountuz rak potred ar c'hil krog,
 Ar re-ze 'n eur dremen dreist oll a gomzas rog :
 « Prim e vijemp rinset euz ar vro emezo
 « Ma n'oa ket mad deomp mont do ober evel do. »
 A drugarez Doue, emaoc'h ganeomp breman.

PAOL.

Fisiit en ho tivreac'h hag er C'hrist da gentan.

PATRIK.

Mirit en han Doue, na beurgasfet hor gouenn.

KOLOMBAN.

Eun toullad bugale, Aotrou Paol o tremen.

PATRIK.

Da ouel an heol ez eont ar vugaligou daour
 O kas gantan dezan kurunennou bleun aour.

IX DIVIZ

PAOL, PATRIK *hag* ar VUGALE.

PAOL.

Tostañt bugale, n'eo ket da deoc'h kaout aoun.
 C'houi zo mignon d'in-me, na spountit ket raozoun.
 Pe leac'h ho peuz kavet ho pleuniou alaouret ?

BENEN.

E stank Kerliviri hon deuz o destumet.

PAOL.

Deuz aman 'ta d'am c'haout, potrik e benn tenval
 Ha me lakañ d'eoc'h oll, merk ar C'hrist war ho tal.

BENEN.

Ar C'hrist, piou eo hennez ?

(Benen da Neventer, ar bihauna).

Deuz 'ta.

NEVENTER.

Aoun !!!

BENEN.

Deuz atao.

PAOL.

Ar C'hrist eo mab Doue.

BENEN, *da Neventer.*

Hennez n'eo ket drouk.

NEVENTER.

D'eo.

BENEN.

Galloudek eo ar C'hrist ?

PAOL.

Divent eo e c'halloud

Ha pewar c'horn ar bed a c'hell e zourn tizout.

BENEN.

Hag e lagad ivez a wel keit hag an heol ?

PAOL.

Pelloc'h va bugale, hennez a wel dre oll

DIDER.

En noz e wel ivez ?

PAOL.

Koulz en noz hag en deiz.

BENEN.

Ne gousk pennad ebed ?

PAOL.

Hennez ne vez ket skuiz.

HERVE.

Ne c'heller ket neuze mont da guzet outan ?

PAOL.

E zell a c'hell para er c'hornou kuzetan.

BENEN.

Aman' man.

PAOL.

Aze' man.

DIDER.

A hon ?

PAOL.

Ya.

HERVE.

Du hont pell

War ar goabrenn.

PAOL.

E kerz war eskell an avel.

Hennez eo a laka ar mor bras da grozal

Hag e kreiz ar goabrenn ar gurun da strakal.

EFFLAM.

Oh ! na pebez Doue !

BENEN.

N'eo ket ken gallouduz
Evelato ha m'eo er vro-man an heol ruz.

PAOL.

Galloudusoc'h eo kalz ; an heol zo eur benvek
A hej hag a zihej e zourn oll c'halloudek.

EFFLAM.

Ha c'houi a gar ar C'hrist ?

PAOL.

E veleg oun va mab,
E c'halloud zo ganen, ha goude an dibab
En deuz great ac'hanon, penaoz n'her c'harfen ket.

BENEN.

C'houi eo beleg ar C'hrist ?

PAOL.

Me eo !

HERVE.

M'em euz klevet

Va mamm o lavaret emaoe'h wardro Kastell
Pe Vaz o chom.

PAOL.

Me zo o tont euz eur vro-bell.

BENEN.

Euz a Geraez !

PAOL.

Pelloc'h.

EFFLAM.

Euz a Wened !

PAOL.

Pelloc'h

Euz Breiz-Veur.

ENEOUR.

Euz Breiz-Veur, ha breman e chomoc'h
Er vro-man ?

PAOL.

Chom a rin.

DIDER.

Ha petra reoc'h aman

PAOL.

Prezeg ar C'hrist va mab, ma karfot anezan.

HERVE.

Beleg ar C'hrist eme va mamm a ya da vleiz
Bep loar nevez hag a zebr ar vugale geiz
A bella diouz ar gear

PAOL.

An dra-ze a zo gaou
Beleg ar C'hrist ho kar kement hag ho mammou

ENEOUR *ha* BENEN.

Kement hag hor mammou ?

PAOL.

Ha kalz muioc'h zoken.

EFFLAM.

Ho Krist hag hen a gar ac'hanomp ?

PAOL.

Ya laouen !

EFFLAM.

Neuze ni a deuio divezatoc'h d'ho kaout
Ho Krist p'eo gwir hor c'har a garfemp da anaout

BENEN.

Hizio eo mall deomp mont étrezek an tantad
Trcuz a c'hellfemp klevet ma vefemp divezad

PAOL.

Kenavo bugale, ra vezoc'h benniget
Gant ar C'hrist

AR VUGALE.

Kenavo.

BENEN.

Breman vô red redet

SENY (*Eur mesaer*).

Al lônéd aotronez a zo ouz ho kortoz

PATRIK.

E Kastell e vezimp araok ma vo re noz.

FIN AN ARVEST KENTA.





II ARVEST

I DIVIZ

PRIMEL, ERWAN, DIVI, JERMEN, SULIAU *ar barz.*
PATERN *ar c'haner koz*, BUGALE.

PRIMEL.

Ah ! na pegen didrous eo hizio ar c'hastell !

ERWAN.

N'euz nemed trouz fraoed o strakal o eskell
Ha soroc'h ar wiz kos o rodella er fank
O c'hervel war he lerc'h he forc'helled yaouank

JERMEN.

Sal e vefe bemdez gouel an heol en dervenn
Neuze ne vefe ket marteze ken torpenn
Beva wardro aman.

DIVI.

Brao omp en em gavet

Etouez ar baganiz.

ERWAN.

Bah ! red eo kemeret

An dud evel m'emaïnt.

PRIMEL.

Edoug an noz edont

Wardro ar wezenn dinn, o youc'hal ma oa spont
O c'hlevet.

DIVI.

O pedi eo e oant evelse

PRIMEL.

Pounner glev rank beza o doueou neuze

ERWAN.

Arabad eo deomp klemm, pa neuз ket re a dro
Brao eo pa c'houzanvont ac'hanomp barz ar vro

JERMEN.

Ah ! penaoz n'oc'h ket eat d'an dervenn da vragal
Hizio ganto dioc'hu, p'o c'harit kement all.

ERWAN.

Perak n'o c'harfen ket ? Paganiz int gwir eo
Mez ha gwellaat a raïnt o kasaat anezo.
Eleac'h beza dalc'hmad o klask kement a c'hell
Lakaat trouz ha tabud etrezomp da zevel
Perak ne glaskfemp ket evit beza krenfoc'h

Da stourm ouz ar zaozon, en em glevet pelloc'h
Ganto !

DIVI.

Gant paganiz !

JERMEN.

Tud mil milliget
A vez gant dourn Doue ken stris all kastizet !

PRIMEL.

Ankounac'heat ho peuz ar pez a c'hoarvezas
E kear Iz n'euz ket pell edoug ar goueliou bras

SULIAU.

Ar mor en e gounnar lammet dreist ar sklujou
A weledas ar gear e kreiz he dizursiou.

*Petra zo' nevez e kear Iz
Ma zeo ker foll ar yaouankiz
Ma klevan me ar biniou
Ar bombard hag an delennou ?*

*N'euz e kear Iz netra nevez
An ebatou a vez bemdez
N'euz e kear Iz nemed traou koz
An ebatou a vez bennoz*

*Bodennou drez zo diouanet
Dor an iliz a zo prennet
Ha war ar beorien o ouela
Ec'h hisser ar chas d'o drailla.*

*Abès merc'h d'ar Roue Gralon
Tan an ifern en he c'halon
Er penn kenta euz an diroll
A gas d'he heul ar gear da goll.*

ERWAN.

Ar baganiz n'int ket oll'evel tud kear Iz
Anaout a ran dija etouez an arvoriz
Tud hag a vo gellet eaz awalc'h dont abenn
D'o lakaat da gemer dizale hor c'hredenn
Nemed vô red diskouez e karer anezo.

JERMEN.

It eta d'an dervenn da brezek dirazo !

ERWAN.

Me ! n'emaoun ket e tro ! Pa blijjo gant Doue
Digas deomp beleien e raïnt al labour-ze

JERMEN.

Ac'han di 'e c'helli, paterat meur a dro !

PRIMEL.

Mervel a raïmp aman heb beleg war hon tro.

DIVI.

Koulz oa beza chomet e bro goz hon Tadou
Goude ma vijemp bet lakeat oll a dammou
Neuze da vihana o koueza en dachenn
Ne vijemp ket marvet heb gras an absolvenn.

JERMEN.

Bah ! lez ar sonjou ze pell diouzit da nijal
 P'ema omp aman emaomp ha n'eo ket e leac'h all.
 Kemer da delenn barz ha sav eur ganaouenn
 A vô goest da lakaat hor c'halonou laouenn.

SULIAU.

Amzer ar blijadur, siouaz zo tremenet
 Penaoz e kanin deoc'h, va zelenn zo merglet
 Ha va c'halon a ouel, noz deiz a ouel em c'hreiz
 O welet pegement eo diskaret hor Breiz.

ERWAN.

Ah ! piou a oar !... gwellaat a rañ an traou da vont
 Barz kemer da delenn ha kan ar vro da zont.

II DIVIZ

PRIMEL, ar GEDOUR, DIVI, JERMEN.

PRIMEL.

Ar gedour o tiskenn — nevezenti a zo
 Gantan. — Ah ! ta gedour hag a nevez er vro ?

AR GEDOUR.

Patrik a deu d'ar gear ha tud war varc'h gantan.

DIVI *ha* PRIMEL.

Patrik ken abred all !

AR GEDOUR.

Menec'h int a gredan.

DIVI *ha* PRIMEL.

Menec'h o tont aman ?

AR GEDOUR.

Ya pa lavaran deoc'h
 Emañt o tont d'an neac'h, dizale ho gwelfoc'h.
Ar gedour a ya kuit.

JERMEN.

Mad biskoaz kement all. — Pa gomzer euz ar bleiz...

III DIVIZ

Ar re a oa kent PATRIK ha PAOL hag e dud ouspenn.

PATRIK.

An Aotrou zo er gear ?

Eur beleg euz a Vreiz.

A zo o tont d'e glask.

DIVI *ha* PRIMEL.

Eur beleg !!

SULIAU.

Eur breizad !!

Pokat a reont d'e dreid.

PAOL.

Doue r'ho pennigo.

JERMEN, DIVI, PRIMEL, SULIAU, ERWAN.

Bennoz Doue deoc'h Tad.

ERWAN.

An Aotrou n'eman ket er c'hastell en de-man
D'an Enez Vaz eo eat er gentaou.

KOLOMBAN.

Pell eman

An Enez ze' c'halenn ?

ERWAN.

Nan, n'ema ket gwall bell.

JERMEN.

N'eo netra mont dre vag pa vez mad an avel.

ERWAN.

Chomit eur pennadik da ziskuiza aman.
Hag ember ni yelo d'ho kas betek ennan.

E Baz pell diouz an trouz o lenn hag o skriva
Hag o pedi Doue e kar hor mestr beva.

JERMEN.

N'oun ket penaoz e pad.

DIVI.

Kaout a rañ e varo

Er c'hos toull kutez-ze

PRIMEL.

An dragon hel lounko

Gwelet a vezo great.

PAOL.

Eun dragon zo e Baz ?

PRIMEL.

Eun dragon zo eno.

DIVI.

Chê ! n'her gwiec'h ket c'hoaz.

PAOL.

Ar wech kenta eo deomp da glevet kement all.

PRIMEL.

Eul lagad ruz heb ken dezan e kreiz e dal,
Skantou glaz ha kalet tro wardro d'e ziouskoaz
Ha kement pe vrassoc'h hag eur c'nole daou vloaz

E lost kordigellet evel eur vins houarn
Hag e c'hinou marlonk digor rez e ziskouarn
Skilfou gwenn kann enni ha lemmet a zoare

KOLOMBAN.

Ha Wizur a gred mont da jom di daoust da ze.

JERMEN.

Arabad deoc'h kredi e vijemp bet lezet
Da deuler troad er vro anez d'al loan devet
M'omp karget da ziuall.

PRIMEL.

Wizur a fell dezan
Kaout an tu da derri e benn ifern outan,
Ha kaër en deuz poania ne c'hell ket dont a benn
Euz e daol : ar birou ne zankont ket zoken
En e groc'hen, ha p' en em gaver d'e c'hlaza
Nemed mont en egar goasoc'h goasa ne ra,
A zaill e lamm warnoc'h hag en eur c'henaouad
Emaoc'h lonket gantan.

SAN.

Arabad mont di tad,
Ne fell ket d'in beza debret gant an dragon.

KOLOMBAN.

Galloud an Tad zo bras, arabad d'id kaout aon
Ankounac'heat az peuz ar burzudou dispar
En deuz great abaoue m'emaomp gantan war var

Euz an amzer da zont, taol distaol euz eur vro
En eun all,

KERAN.

Ya ! an Tad, adarre hor miro

SULIAU.

Kenvroiz pa deuit eur bro goz hon Tadou
Livirit deomp penaos ema eno an traou ?

PAOL.

Ne wella ket an traou da vont c'hoaz e Breis-Veur

SULIAU.

Atao ema an tan, atao ema'n dizeur ?

PAOL.

Atao,

SULIAU.

Atao ema al lagerez ?

PAOL.

Atao.

KOLOMBAN.

Ar zaozon digernez a zo bemdez war zao

SULIAU.

Mil malloz war o fenn ? — Perak n'omp ket chomet
Da stourm betek mervel en hor bro mahomet

Gant ar zaoz milliget.

ERWAN.

Da beurlaza hor gouenn

PAOL.

Heb gouenn ar Vretoned, Breiz n'eo Breiz ebed ken.
E leac'h m'ema ar ouenn, eno ema ar vro.

ERWAN.

N'oa Breiz ebed aman, ni breman her graio,
Ha p'eo gwir oc'h deuet, hiviziken netra
Euz ar pezh a zo red kaout da ziazeza
Eur vro ne vank deomp ken !

JERMEN.

Piou oc'h hentchas aman ?

PAOL.

Dourn Doue am renas ha sentet' meuz outan

JERMEN.

N'oc'h deuet nemed pemp en o lestr euz Bro-Breiz

PAOL.

Daouzek beleg e oamp ha tud all c'hoaz eleiz
Zo chomet e Porsall da c'hedal ma vin bet
O kaout Pennou ar vro :

ERWAN.

Ra vô Doue meulet
Rak evel ma laka d'ar bugel d'e zevel
Eur vamm garantezuz e kichen e gavel
'Velse d'ar Vretoned harluet euz o bro
E ro eur Vreiz nevez ha Sent hag he savo

IV DIVIZ

An re a oa kent, AR GEDOUR.

AR GEDOUR.

Daou bôtrik yaouank flamm a zo e tal an nor
Anter zihalanet hag a c'houlenn digor.
Euz a ouenn tud gentil a gredan int ganet
Kaër eo o gwiskamant ha kaëroc'h o gened.

ERWAN.

Mad diskenn ha digor ha gra dezo pignat
Ma vô gwelet piou int.

Ar gedour a ya kuit.

V DIVIZ

Ar re a oa kent, NUZ ha TELO.

PATRIK.

Nuz ha Telo m'oar vad,

Te eo Nuz !

NUZ.

Ya me eo ! ha Telo zo ganen
Deuet hon daou d'ar red adalek an Dervenn
Evit lavaret deoc'h ema an arvoriz
Kounnaret oll spountuz o tont aman gant tiz

ERWAN.

Kounnaret ha rak piou ha perak ?

TELO.

Eneb deoc'h.

PRIMEL, ERWAN.

Eneb deomp ?

TELO.

Oh ! tec'hit buhanna ma c'helloc'h
Nemeur e talefoc'h e vô re zivezad,
Sûr mad !

ERWAN.

Ha petra ra d'an dud-ze hor c'hasât
Kement all !

TELO, *Nuz epad an amzer-man a zello kenan ouz Paol.*

An Drouiz en deuz o fennfollet
O lavaret dezo bremaik edo kollet
Ar vro ma c'houzanfjet enni eun den hebken
Ha ne bleg ket e c'hlin war dachenn an dervenn
Ha toui *ruz glaou tann* o deuz great oll raktal
E vije benn an noz great d'ho mell kein strakal
War gerreg an torraod.

PAOL.

Na spountusa kelou

ERWAN.

Va goad em izili a skourn ouz ho selaou.

AR MANAC'H.

Betek pegoulz o Krist e vezimp evelhen
Taol distaol euz an eil lac'hadek en eben.

NUZ.

Ni ne gredomp ket ken e beleien a zo
O brasa plijadur gwelet goad dirazo
Doue a zo Doue abalamour m'eo mad
Ha klask a ran e skeud en neb zo e gannad
Ha set'aze perag omp diredet d'ho kaout
Ha da vervel ganeoc'h.

PAOL.

Danvez eur c'hristen out

PATRIK.

Setu beleg ar C'hrist ! Nuz !

TELO.

Ah ! Ah ! pell a zo

Edomp ouz ho kedal da zigouezout er vro.

PAOL.

Bennoz ar C'hrist warnoc'h ho taou va bugale
Ha ra vezo Jezuz laouen ouz hoc'h ene

NUZ.

Mar plij ganeoc'h lakaat an dour sakr war hon tal
E varvimp vel m'eo dleet hag e varfemp raktal

PATRIK.

Tec'homp buhan buhan ; divezatoc'h e Baz
An Tad a raï warnoc'h gant an dour sin ar groaz
Pe mar plij gant ar C'hrist e varfec'h er stourmad
Nemed kaëroc'h a ze badezet en ho koad
E vefoc'h da bignat etrezek ho Toue.

ERWAN.

D'an traon goazed d'ar red. Sammit ar vugale

JERMEN.

Arabad eo tec'het, aman emamp e tro
D'en em zifenn gwelloc'h a eneb ar maro
Eget e neb leac'h all. Ar mogerioù zo mad
Hag an norioù zo krenv. Arabad eo kuitat
Ar c'hastell koz.

PRIMEL.

Nan nan, arabad mont da Vaz
Eno ema'n dragon hol lonko'n e gof bras,

DIVI.

Arabad mont, tra tra !

ERWAN.

Ne c'hellimp ket harpa
Aman nemeur e vo a dud ouz hor c'hilha.

VI DIVIZ

Ar re a oa kent, AR GEDOUR.

AR GEDOUR.

An heut a ziabell zo fuyen warnezan
Hag eur strollad goazed a deu d'ar red aman

PATRIK.

O Krist diskouez ha te gar c'hoaz ar Vretoned
Pe c'hoant az peuz e ve o gouenn peur-zismantret.

ERWAN.

Ma n'hor mirit c'houi ket, o Krist piou hor miro.

SULIAU *ha* PRIMEL.

Komzit dezan Aotrou hag hen ho selaouo.

PAOL.

Va fedennou d'in-me zo dister bugale.

SULIAU *ha* PRIMEL.

Pedennou piou a dal, ma ne dal ket ho re.

ERWAN.

Pedit epad ma vimp o tiouall an noriou
Arabad eo skourni, dillo d'an traon tudou.

Erwan, Primel, Divi ha Jermen a ziskenn d'ar red.

VII DIVIZ

PAOL, *hag e dud*, PATRIK, PATERN *hag ar* VUGALE.

KERAN.

Ho kannad euz an nenv deoc'h en deuz lavaret
Edo ar vro laouen prest d'ho tigemeret,
Edo ar Vretoned hag an Arvoriz paour,
O c'hedal diganeoc'h kaout ho kenteliou aour.
Hag hen-man eo breman an digemer laouen
A c'hedec'h en Arvor.

PAOL.

Doue a zo ganen

P'en deuz hen lavaret : ne grenan rak netra
An heol gant ar goabrenn pa vez en e gaëra
A vez kuzet. Komzou Doue a sked bepred,
Hag en o sklerijenn kendalc'homp da gerzet
Heb enkreuz hag heb aoun.

SAN.

Ne fell ket d'in mervel
C'hoaz, re dost e kavan eo va bez d'am c'havel.

VIII DIVIZ

PEDEN SANT PAOL.

O Krist meur, o Doue, ro skouarn d'am selaou
Ha teurvez euz da lez gwelet hon trubuillou.

En amzer gos Breiz-Veur a oa d'ar Vretoned
En aner e klaskjont he c'haout ar Romaned
Breiziz a stourme goenv ha da zen ne blegjont,
Nemed deoc'h c'houi o Krist da genta her grajont.

Ar gwir hag ar furnez a ziouanas e Breiz,
Ha ker kaer santelez a vleunias en o c'hreiz,
Ma c'helljot lezhenvel Breiz-Veur, enez ar zent ;
Mez d'ho kourc'hemennou kalz a deuas dizent.

Kaër a oa o embann ne reat ket ken diouto
 Re zinerz e kavet an diskoaz diouz o yeo
 Hag ez eat digabestr da heul ar goall dechou
 Heb gouzout ez edot oc'h hada had daëlou.

Neuze da gastiza ho pobl muia karet
 Ho peuz laosket warnan ar zaozon da redet
 Ha dindan o fraillou a zourne a zoare
 Pennou ar Vretoned a vil vern a goueze.

Goasket eo bet Breiziz vel ma wasker rejn
 Da lakât anezo da redet rus ar gwin.
 Hon Tadou en hor raok zo maro er stourmad
 Ni zo bet taol distaol, gwasket, gwasket dalc'hmad.

Breman p'hon deuz gellet tec'het kleze ar zaoz
 Ha lakat etrezomp hag hen ar mor da vaoz⁽¹⁾
 Daoust ha breman dres eo e vô red deomp mervel
 Kerkent ha m'omp pelleat diouz douar hor c'havel?

Nan, nan, nan, nan, o Krist, nan nan, arabad eo
 Lezel an arvoriz d'hor sebelia ez-veo
 En aoun ne lavarfent o welet hor c'hollou
 Eo dinerz hon Doue e skoaz o doueou.

Nan, nan, arabad eo lezel ouenn ar Vreiziz
 Da veza dismantret dre zourn an Arvoriz
 Rak gant an diveza euz hor gouenn a varvo
 Euz ar vro-man er bez hoc'h hano a yelo.

(1) Vaoz = porz, cour e galleg.

Evidon-me baoue ma zeuz buez ennon
 Evidot Krist hebken, e tridas va c'halon
 Kwriteat am euz peb tra, va zad, va mam, va bro,
 Evit senti ouzid betek pred ar maro.

Great am euz tra peb tra, evit heul da ursiou
 Deuet oun en Arvor dreist dounder ar moriou
 Sentet am euz ouzid d'id da zenti ouzin
 O viret na drofe an traou war an tu gin.

Ma teurvezit selaou pedenn ar Vretoned
 Biken gant ar ouenn-ze ne vefoc'h dizonjet
 E leac'h ma c'hell an heol kas e vannou skedus
 Breiziz a brezego, hoc'h hano deoc'h Jezuz.

Paol a gouez d'an daoulin.

IX DIVIZ

Ar re a zo chomet gant Paol a gan :

O Krist Jezuz, c'houi zo el levenez
 Sellit ouzimp rak ni zo en enkreuz.

En enkreuz emaomp oll, na vê hor gouenn dismantret
 C'houi hebken Aotrou Krist, breman a c'hell her mired.

Hon Tadou koz gwechall en hoc'h eneb a bec'has
 Hon Tadou n'emañt mui, mirit ac'hanomp diouz laz.

Ni zo evel an eñ etre skilfou ar bleizi
 Ma n'hor sikourit ket diframmet e vezimp-ni.

Eiz mab am euz ganet seiz er vrezel so marvet
Ho ped truez ouzin laoskit ganen an eizved.

Evel bleuniou tener falc'het araok ar mare
Nemed urz a rofec'h ni a woenvo dizale

Ar bugel-man zo glan, klevit eta e lenvou
Mirit n'hen defe glas, ho mignonik eo Aotrou

X DIVIZ

Ar re a oa kent, PRIMEL hag ERWAN ouspenn.

PRIMEL, o tont d'ar red.

An arvoriz er porz, dor ar c'hreac'h zo torret
Diskennit gant ar vins.

AN RE VIHAN.

O Tad emaomp kollet

ERWAN.

Kemerit dre aman

PAOL.

Diskennit da genta

ERWAN.

An hent dindan zouar a gas d'an aod tosta
Hag er bigi da Vaz, eno e vimp suroc'h.

PAOL.

Ya betek Baz ez aïmp, ne dec'himp ket pelloc'h.

ERWAN.

Klevet a rear o tont d'an neac'h potred ar rîns.

PAOL (*da unan hag a gemer an hent fall*).

N'eo ket aze eo mont, ama ema ar vins.

XI DIVIZ

AN ARVORIZ.

Deomp, deomp, deomp, deomp, deomp, deomp d'ar gad.
Deomp breur, deomp kar, deomp mab, deomp tad
Deomp, deomp, deomp oll, deomp ta tud vad.

Kalon vit lagad, penn vit breac'h
Ha laz vit blonz, ha traon ha kreac'h
Ha tad vit mab, ha mam vit merc'h

Dao ! d'ar gristenien dilidou
Ra varvint oll a strolladou
Diskaret gant hon doueou.

KADOUR.

Aman n'euz den ebed, goullou eo ar gaoued

MILLOUR.

Eun tu bennag michans ema al lapoused

KADOUR.

Lapoused heb eskell a zo eaz da dapa
Araok, araok potred arabad ehana.

Rod ar vilin a valo flour
Gant goad ar venec'h elec'h dour
Araok potred ha prim peb gour.

Dao ! dao ! dao ! dao ! arvoriz vad
Dao ! ma vô beuzet en e c'hoad
Betek an diveza breizad.

FIN AR EIL ARVEST.



III ARVEST

I DIVIZ

WIZUR *bag e FLOC'H war an tevenn.*

WIZUR.

Mad kaër am euz sellet, ne welan den floc'hig.

AR FLOC'H.

O vont da zouara edont aze bremaik
En aot doun koulskoude !

WIZUR.

N'euz den war an tevenn.

AR FLOC'H.

N'o deuz ket bet amzer da vont pell ac'halenn
Epad m'oun bet tec'het da vont betek ennoc'h
Rak great am euz dillo va zro m'hen asur deoc'h.
.....
Ah ! setu i Aotrou !

II DIVIZ

WIZUR *bag e floc'h*, PAOL *bag ar Vretoned*.

PAOL.

Doue r'ho pennigo.

WIZUR.

Beleg ar C'hrist hoc'h c'houi ?

PAOL.

Ya da ! me eo !

WIZUR.

C'houi eo

Ah ! pelloc'h eo plijet gant Doue hor selaou
Ha lakât da baouez hol lenv hag hon daêlou.
Mil meuleudi dezan.

PAOL.

War e urz zo deuet
Teir gwech betek ennon ; oun euz va bro tec'het
Da zont betek aman !

WIZUR.

Mez ouz piou e komzan ;
C'hoant am euz da lavaret ec'h anavezan
Ac'hanoc'h. Ha n'eo ket c'houi eo mab Perphius
Penn-ohen ?

PAOL.

Eo da !

WIZUR.

Paol ?

PAOL.

Ya !

WIZUR.

Na tra souezuz
Henvelep goad a red ennomp hon daou eta
Ho tad ha va hini a oa breudeur.

PAOL.

Petra ?

Pa lavare Patrik hoc'h hano d'in gentaou
Edon pell diouz sonjal ennoc'h Wizur m'hen tou.
M'ho krede c'hoaz e Breiz ?

WIZUR.

Den ebed ne garfe.
Chom eno gant ar Zaoz.

JERMEN.

Hag aman dizale
E vezimp c'hoaz falloc'h.

WIZUR.

Aman !

JERMEN.

An arvoriz
A deu warnomp en dra c'hellont gant an Drouiz
Hag Ury en o fenn.

WIZUR.

Petra c'hoarvez ganto
P'emañt ken egaret ?

ERWAN.

Ni zo war o meno
O chacha war ar vro malloz an Doueou
Pa n'eo ket mad d'eomp mont d'an dervenn d'ho goueliou
Ha rins a rank beza great warnomp oll dioc'htu.

JERMEN.

Ne jom euz ho kastell nemed eur bern ludu.

DIVI.

Ha c'hoaz eo bet brao deomp gellout en em denna.

WIZUR.

Kredi'rit e teuñt warnomp betek aman ?

JERMEN.

Dall int gant o c'hounnar, ha war ger an Drouiz
E yaffent d'ar maro hep gina e nep giz.

WIZUR.

Diskennit war an aod, ha ma kredont tostât
Grit d'ho pirou c'hoari m'o lakaint da bellât.
Diouallit koulskoude da vont re er c'hus-heol
En aoun ne lakafec'h an dragon da ziroll
Ha da zailha warnomp.

JERMEN.

Teuleur a raimp evez.

Tud Wizur 'en em denn.

III DIVIZ

WIZUR, PAOL, *an dud Jentil Breizad hag ar Vugale.*

WIZUR.

Na pebez enkrezenn e kreiz va levenez.

PAOL.

Neb na ouel ket er bed, nak en deiz nak en noz
A vezo beac'h dezan c'hoarzin er baradoz.
Arabad koll kalon ; pa vez ar barr amzer
En e voasa e vez tosta an amzer gaër ;
En izelved paour-man Doue a ren peb tra
Ha ren a oar Wizur, bezit dinéc'h eta !

WIZUR.

Hunvreou am euz great aman n'eo ket diouz kont
 Divvarbenn an Arvor hag he amzer da zont.
 Va youl araok mervel oa gwelet an diou ouenn
 Breiziz hag Arvoriz unanet da viken
 Dre ar goad, dre ar feiz, dre ar yez, dre ar vro
 Ha goest hiviziken da stourm ouz ar maro,
 Da viret ouz estren da zont ken d'o goaska
 Da laërez diganto o zammik peadra.
 Va youl araok mervel oa gwelet en Arvor
 Eun heol nevez o skuilh e sklerder hag e c'hor,
 An Arvoriz o nac'h o doueou pagan
 Hag o sevel dre oll ar groaz war ar peulvan.
 Va youl araok mervel oa gwelet an douar
 Irvi edok ennan troët gant an alar,
 Gwelet e tal peb ti, kalz a vugaligou
 Ker koant ha ker sentuz hag elez an nenvou
 Ha setu en eun taol va hunvreou teuzet
 Hag an had a hademp o tiouan frigaset

PATRIK.

Eun arvoriad a zo ha pa ne vefe ken
 Ha pa varfe hirio a varvo e kristen.

WIZUR.

Ha gwir eo kement-ze ?

PATRIK.

An Tad her badezas.
 O tont aman bremaik e stivel Porz an Treas.

Nuz eo, ha setu hen hag e vignon Telo
 Kuiteat o deuz o daou, beleien an Dero
 Ha deuet int d'hor c'haout da gemenn deomp tec'het
 Araok an Arvoriz.

WIZUR (*a bok da Nuz*).

Krouadur benniget

Aoun am euz na vefe saë wenn ho padisiant
 Takennet gant ho koad a verzer hag a zant
 Ha ne vefec'h ember kutuilhet vel ar roz
 Kerkent ha m'int digor da vont d'ar baradoz

NUZ.

Ma vezan kutuillet evel ar roz ember
 Gant ar C'hrist e kavin eur c'haër a zigemer
 Ha va ene gwennet en dour meur hag er goad
 Ha rai vad d'e galon ha dudi d'e lagad.

TELO.

An Arvoriz a gerz war hentchou ar maro
 Piou ma ne jomit ket o zenno diwarno.

NUZ

O veva d'o c'helenn e c'hellan kenderc'hel
 O vervel va maro o c'helenno kalz gwell.

TELO.

Ah ! Nuz na pebez nerz az peuz hizio kavet.

NUZ.

Nerz Doue eo Telo, a zo em goazied.

TELO.

Me gren rak ar maro.

NUZ.

Badezet en da c'hoad
Kaër e pignimp hon daou etrezek hor gwir Dad.
Arabad eo krena.

TELO.

Ar vuez a zo c'houek
D'an neb a zo yaouank, seder ha kalonek

NUZ.

Mervel zo beva gwell e liorz kaër an nenvou,
Mervel zo divleunia da gaout kaëroc'h bleuniou.

TELO.

Ha va mamm ha va zad, o c'halon a fraillo
Gant ar c'hlaç'har ember pa gavint ti goullo.

NUZ.

Hon elez mad Telo war o eskelligou
Euz an nenv a deuio da zec'ha o daëlou.

PAOL.

O Krist ema lakeat, war barlenn an Iliz
An damouezenn genta perlezennet a c'hliz

Destumet en Arvor.
. Na pebez eost eta
Ma vez gellet e varn diouz ar penn ed kenta
A gaver en dachenn a zestumoc'h ember
Ma teurvezit miret an eosterien seder.

WIZUR.

Oh ! ar C'hrist ne c'hell ket o tigas en dachenn
Hag ho tiskar kerkent, c'houi c'hoaz war ar c'hlizenn.
Mez kontit d'in penaoz ho peuz bet urz Doue
Da zont betek aman.

PAOL.

Eun dervez ar Roue,
Eur c'hristen mad a zen, am galvaz en e lez
D'am fedi da brezeg en e rouantelez
Dezan ha d'e dudou, hag en eul lec'h pe lec'h
Pell oun bet o prezeg ar C'hrist gant va menec'h
Betek ma savas c'hoant gant ar Roue kristen
D'am lakât da Escob, me beac'h d'in en em ren.
O klevet kement all, oue dare d'in semplan
Ha me ha mont d'e gaout ha lavaret dezan :
Gwell eo ganen beza o redet ar moriou
Taolet ha distaolet er vann gant an tarsiou,
Kaset gant an harlu euz eur vro en eben
Heb habaskded ebed, eged ne d'eo ganen
Dougen eur vaz Eskob re bounner diouz va dourn
P'eo gwir ar vaz abad a zo tenn evidoun.
Mez ar Roue warnon a reas c'hoas goasoc'h goaz,
Ha me lakeat gantan nec'hetoc'h'ged biskoaz

Ha lakaat doun em fenn tec'het pell diouz va bro
 Ha diouz ar c'hargou bras n'oan ket great evito.
 Evelato en aoun da vont' eneb Doue
 O tizenti a greñ ouz lavar ar Roue
 E pediz va Zalver da ober d'in anaout
 Petra c'hede diouzin, e rajen va galloud
 Evit senti outan. Setu ma tiskennas
 Eun eal e kreiz an noz hag e c'hourc'hennennas
 D'in treuzi ar mor glas heb chom ken da zale.
 Pa gasis ar c'helou euz a ze d'ar Roue
 Ne fellas ket dezan va lezel da dec'het
 Ha pa ne ve d'e dud biken n'em bije bet
 Aotre da vont en hent. Araok kuitaat e lez
 Evit merka ez ean euz e rouantelez
 Vel kent gant e c'hrad vad, e c'houlenniz eun dra.
 Unan euz ar seiz kloc'h a c'halve da breja
 An dud en e balez. Mez ne reaz van ebed
 O klevet va goulenn, ha me en hent bepred,
 Daouzek beleg ganen, nied ha kendirvi
 Hag e teujomp euz Breiz da Eusa war bigi
 Bet dare deomp beuzi hed an hent meur a dro.
 Eun eil gwech, Eal Doue a gomzas d'in eno :
 N'eo ket aman' mezan war eun dosenn ken enk
 Ha skoët a bep tu gant an tarsiou direnk
 Eo e fell d'an aotrou az kwelet dibreder,
Pelloc'h eur bobl a bez a zo warnez ober
 Eun digemer kaër d'id, — *eur bobl a bez* az ked
 A raï vad d'az kalon ha dudi d'az spered,
 Eur bobl a bez a ri dezan anaout Jezuz
 Ha dilezel da vad an doueou euzuz.

Ken aliez a zen az pezo digaset
 Diwar an hentchou fall m'oant warno dianket,
 War hent ar Baradoz, kent aliez a zen
 A raï d'id er bed all eur gaër a gurunen.
 Pelloc'h eta dillo ! *Doue a zo ganed*
 Ha ni' darre war vag hag en hent divorc'hed
 Etrezek an aochou a welet o venna
 Tostik tost deomp ker brao er sav heol da Eusa.
 Pa zouaremp, an Eal evit an drede tro
 A ziskennaz d'am c'haout : — *Aman emezan eo.*

PATRIK.

Unan a deu d'ar red, daoust hag an Arvoriz
 A vefe digouezet, pa lak kement a diz.

IV DIVIZ

A re a oa kent eur pesketaër ouspenn.

AR PESKETAËR.

Sellit Aotrou Wizur, na pebez kavaden
 'Maoun o paouez ober !

WIZUR.

Eun eok⁽¹⁾ eo.

(1) Eok = *saumon* e galleg.

AR PESKETAËR.

Ya ! laouen.

Seurt na weliz biskoaz, eur c'hloc'h en e c'henou

WIZUR.

Eur c'hloc'h en e c'henou ?

AR PESKESTAER.

Aze edo m'hen tou ?

WIZUR.

Mad biskoaz kement all na weliz em buez.

AR PESKETAER.

Ar vech kenta ma ran eur seurt pesketerez.

AR FLOC'H.

Biskoaz ne veliz c'hoaz ar mor o tougen kloc'h
Na pesk ouz e sturia : Biskoaz !

WIZUR.

Na me, va floc'h.

PATRIK.

Mantrus eo velato !

WIZUR (*St Paol o c'hoarzin*).

Perak e c'hoarzit Paol ?

SANT PAOL.

C'hoarzin a ran Wizur, o welet pebez taol
 Zo great d'ar Roue Mark : e gloc'h dres eo hennez
 An hini, c'houlennis araok dont euz e lez.
 Gwelet a ran breman e klev buhan Doue
 Ha n'eo ket pounner glev evel m'eo ar Roüe.
 Pa c'houlenner outan mar d'eo reiz ar goulenn
 E c'heller beza sur e klevo ar bedenn.

WIZUR (*o rei ar c'hloc'h da sant Paol*).

Dalit ho kloc'h Aotrou, kemerit an hirglas ⁽¹⁾
 Digaset gant Doue d'oc'h heul dreist ar mor glas.

SANT PAOL.

Bennoz deoc'h va Doue, d'am beza salaouet
 Ha deoc'h kender Wizur.

(*War ar c'hloc'h e ra sin ar groaz*).

Ra vezi benniget,
 En han an Tad, ar Mab hag ar Spered santel.

AR MANAC'H.

Evelse beze great !

SANT PAOL.

Ra zoni da c'hervel
 An dudou reuzeudik zo aman o c'hortoz
 Beleien d'o lakaat war hent ar baradoz.

(1) HIRGLAS eo an hano roet da gloc'h Sant Paol abalamour d'e liou
 ha d'e vent.

NUZ.

Ra gasi d'an nenvou keleier an Arvor
Maro an doueou, d'ar C'hrist eo an henor.

V DIVIZ

Ar re a oa kent, ha NAN ouspenn.

NAN.

You ! you ! an Arvoriz ! emaint o tont aman
En o bigi aozil ha tiz warno kenan.

PATRIK.

Gouezidi diouz eun tu, an dragon en tu all
Lonket e vezimp oll, pe strinket en dour sall.

WIZUR.

E p'leac'h ema're all ?

NAN.

N'int ket evit herzel

Outo da zont en aot.

VI DIVIZ

Ar re a oa kent hag eun toullad bretoned ouspenn.

Breizh o tont

O Krist

O Tad Santel.

JERMEN.

Emaint o tont warnomp.

PAOL.

Arabad eo krena
Doue zo bet ganeomp, adarre rank beza !

ERWAN.

Tad setu i.

PRIMEL.

Tec'homp !

DIVI.

Tec'homp !

ERWAN.

Hor bennigit :

DIVI.

Ar maro eo breman,

JERMEN.

O Tad hon absolvit.

PAOL.

Doue hebken zo mestr, hag euz a benn an den
Nemed urz a rofe ne gouez ket eur vleven ;
Bezit fisians ennan.

NAN.

Ah ! va mamm pa glevo.

PAOL.

Bezit fisians eta ha Doue ho salvo.
Pedit.

SULIAU.

Pedi petra, Doue a zo bouzar
Ne glev na ne wel ac'hanomp er c'hlaç'har
Pedet awalc'h hon deuz !

PAOL.

Red eo c'hoaz kenderc'hel.
Dont a rai e klevo o youc'hadenn santel.

O Krist Jezuz c'houi zo el levenez
Sellit ouzimp, rak ni zo en enkreç

Ni zo evel an ein etre skilfou ar bleizi
Ma n'hor sikourit ket, diframmet e vezimp-ni

O Krist Jezuz c'houi zo el levenez
Sellit ouzimp, rak ni zo en enkreç.

AR BAKANIZ, a bell.

Deomp, deomp, deomp, deomp, deomp, deomp d'ar gad
Deomp breur, deomp kar, deomp mab, deomp tad
Deomp, deomp, deomp oll, deomp ta, tud vad !

Rod ar vilin a valo flour
Gant goad ar venec'h eleac'h dour,
Araok potred ha prim peb gour.

*Ar Vretoned a dec'h eun tamm ha Paol a wish
e zillad-offerenna.*

VII DIVIZ

An ARVORIZ hag ar VRETONED.

PAOL, d'ar Vretoned, dizroët d'e heul.

Chomit oll em c'hichen, arabad eo tec'het

D'an Arvoriz.

Ne skoit ket va zud, pa ne reont drouk ebed'

AN DROUIZ.

Ma n'o divije ket gwall c'hreat en hor c'henver
Ne vijemp ket deuet da givizat o ler.

GUY.

Hon doueou n'ouzont nemed c'hoari da fall
Bac'had dezo ma zaïnt d'her gwelet er bed all.

PAOL.

Ne skoit ket va zud — Ni n'omp ket tud a freuz,
Perak kaout kasoni ouzomp evel m'ho peuz.

AN DROUIZ.

Perak komz er vro man eneb hon Doueou !

PATRIK.

Ho toueou deoc'h c'houi n'int nemed hunvreou

MILLOUR.

Mil malloz war da benn enebour an heol rus.

PAOL.

N'euz nemed eur gwir heol hag hennez eo Jezuz
A bleger dirazan, en nenv war an douar
Hag en iferniou yen. Hen eo Roue ar c'hloar !

(da unan hag a venn skeñ ar Vretoned)

Na skoit ket va zud.

MILLOUR.

Dao d'an divroidi
A ziskenn er vro-man da ober o mistri.

GUY.

Ury ha Devedek eo a ren en Arvor
Ganto' ma ar c'halloud, dezo eo an henor.

WIZUR.

Ni n'hon deuz ket komzet eneb mistri ar vro
Hon divreac'h hag hor goad pa girint o dezo
Da viret na deufe na saoz na gall ebed
Da flastra an Arvor gant o zreid milliget

AN DROUIZ.

O klask an tu emaoe'h, gant kenteliou iskiz
Diouz lidou koz an heol da drei ar Yaouankiz.

NUZ.

Eun heol nevez a bar war douar an Arvor,
Dezan hiviziken eo e vô an henor.
An heol koz n'eo netra nemed eur c'hrouadur
A zent ouz an aotrou a zo krog en e stur.

AN DROUIZ.

Mil malloz war da benn, nac'her an Doueou
Grit d'e vell kein strakal dindan dir ho koafou

PAOL.

Na skoit ket va zud, en aoun n'ho pefe keuz
O welet peger krenv eo ar C'hrist.

MILLOUR.

C'hoant ho peuz

D'hor spounta !

PAOL.

C'hoant am euz d'ho lakât da anaout
Ar gwir Doue a zalc'h en e zourn peb galloud
An hin'a sturi an heol ar stered hag al loar
Hag a laka buez da zont war an douar,
An hin'a ren an dud euz ar c'havel d'ar bez
Hag a varn ar Roue kenkoulz hag ar paourkez.
Ne glaskan netra ken.

JERMEN *ha* DIVI.*(Klevet a reer gwi'hadennou spountus)*

An dragon, an dragon!

SULIAU.

Lonket e vezimp oll!

PAOL.

Arabad koll kalon.

URY.

Mar d'eo krenv da Zoue, mall eo d'id hen diskouez

Ha goulenn digantan savetei hor buez.

Ma c'hellez kabestra an dragon kounnaret

Neuze ni gredo oll e Krist ar Vretoned

AN DROUIZ.

Mil malloz déoc'h Ury, roue koz an Arvor

Eat oc'h e bugaleach, koll a rit hoc'h henor.

PAOL.

Bezit e peoc'h Ury, c'houi welo dizale

Peger krenv eo ar C'hrist.

. Piou a deu ganen-me?

SULIAU.

N'eo ket me!

TELO.

Na me!

NUZ.

Me!

TELO.

Oh Nuz!

NUZ.

Me zo kristen,

Eur c'hristen ne gren ket, na rak diaoul na rak den.

PAOL.

Digas d'in da gleze.

(Benniga a ra anezan).

Doue oll c'halloudus

C'houi hag ho peuz krouet gant eur ger burzudus

An douar haz ar mor, an nenv hag e stered,

C'houi hag a lavare gwechall d'ho tiskibled

Ma virit va lezenn e reot va burzudou

Ha re vrasoc'h zoken. — Ho pedi 'ran aotrou

Diwar va fec'hejou da zizrei ho lagad

Ha da zellet hebken ouz ezomm eur boblad

A heulh hent ar maro, dianket pell diouzoc'h

: Grit d'an dragon pellât, hag e kredint ennoc'h

.

Mad eo Nuz! deomp en hent breman, ha c'houi pedit

AN DROUIZ.

Ra vint lonket o daou gant an dragon.

PATRIK.

Sellit!

URY.

Breman e vô gwelet hag ar C'hrist a zo krenv.

PATRIK.

Ne gaver ket e bar en douar nak en nenv.

PAOL.

En han an Tad, ar Mab hag ar Spered santel
Deuz aman.

PATRIK.

Oh burzud ema sparlet.

PAOL.

Nuz ! del

Blein anezan.

(D'an dragon)

Er mor hag arabad d'id ken
Dizrei da deuler spont e bro ar gristenien !

SULIAU.

Ma war e benn er mor !

URY.

Doue Paol a zo bras

ERWAN.

Henor, henor d'ar Christ, henor da Baol e c'hoaz
An hini hor salvas.

(Mont a reont d'e ambroug).

VIII DIVIZ

An drouis-meur e unan.

*Sellet a ra gant tristidigez ouz e dud o
vont da ambroug Paol. Hag e lavar
Goustad, goustad.*

Treac'het oun ganed Paol.

Treac'h eo beleg ar C'hrist da veleien an heol.
Echu eo va amzer, maro an doueou,
Va maro va-unan a glozo o lidou.

*(Tec'bed a ra o kuzat e benn e pleg e vantell
endre ma tizro an Arvoriz hag ar Vreto-
ned youc'hadennou a levenez ganto).*

IX DIVIZ

BRETONEZ hag ARVORIZ.

PAOL

En han Doue Drouiz deuz davedomp en dro,
Ar C'hrist en e iliz laouen az kemero.

URY.

Mil bennoz d'id o Krist, Doue nevez Arvor,
D'id adalek hizio ar vro-man zo digor.
Keit ha m'en dô Arvor ar mor glaz da c'houriz
Da hano vô meulet gant an oll Arvoriz.

Ha c'houi Breiziz d'e heul kemerit plas er vro,
 Tud evel doc'h biken e neb leac'h re ne vô.
 Ha p'eo gwir va bleo gwenn a lavar e tosta
 An amzer d'in da vont d'ar bed all da veva
 E c'houlennan breman ouzoc'h oll Arvoriz
 Kemeret en ho penn Wizur Roue Breiziz,
 Breiziz hag Arvoriz unanet dindannan
 A raï eur ouenn dispar n'hellfot biken kannan,
 Eur ouenn hag a bado keit ha ma pado'r mor
 Da c'houriza e glaz douar sakr an Arvor.

KADOUR.

Komzou Ury zo sakr, komzou Ury zo fur,
 Henor, henor, dezan, ha d'ar Roue Wizur.

MILLOUR.

Henor d'ar Vretoned ha meuleudi da Nuz
 N'en deuz ket bet a aoun rak an dragon euzuz.

PAOL (*da Nuz*).

Hiviziken, mignon, ra vezi e peb leac'h
 Gant an oll en Arvor lezhanvet Gournadeac'h,
 Ha ra zavô er vro az gwelas o tremen
 Tud yaouank evel dot, dispont e peb tachenn
 A gerzo war araok, soun o fenn heb krena
 Hag a raï 'r pezh zo dleet heb damant da netra

NUZ.

Va dever nemed ken, am euz grêt, Tad karet

PAOL.

N'eo ket an oll her gra evel m'az peuz her grêt

URY.

Henor henor da Baol ha da Nuz Gournadec'h,
 Breiziz hag Arvoriz ho meulo e peb lec'h.
 Keit ha ma vô komzet brezonek en Arvor,
 Hoc'h haniou a jomo skoulmet e peb memor.

WIZUR.

Ha me c'helle gedal netra par d'an dra-man
 Diou ouenn en em zavet ha prest d'en em gannan
 Oc'h en em unani dindan bennoz kannad
 Done !

URY.

Chomit ganeomp bepred. — Bezit hon Tad.

WIZUR.

Ha p'eo gwir hor c'harit hol lezit da c'houlenn
 Ma vô baz aour'n ho tourn, ha mintr aour war ho penn
 Goude ne c'hedimp ken nemed m'hor c'hasfot oll
 An eil goude egile da welet ar gwir heol,
 An heol ne vez morze mantellet gant an noz
 Hag a sklerai dalc'h mad liorzou ar baradoz.

Sant Noug, d'ar 15 a viz Eost 1907.



RENNES, IMPRIMERIE BREVETÉE FR. SIMON

